

Plou Kinnad ar Zoudeur iaouanq 848 A 1



KLOAREC KOAT AR RANNOU

ha Metik ^{an K'hanou Krou}

PENN-HERES KERZANTON

gant Jan ar Skour

War ton : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia-Remengol*

Karantez a glac'har !!!

I.

Tud iaouanq a Vreiz-Izel didostait da glevet
Ar recit euz va daëliou ha va foaniou kalet :
Me zo' eur c'hloarek iaouanq a eskopti Quemper
Am boa choaset eur vestrez en eskopti Treguer,

A c'hars ar môr oun ganet en bro sant Gwenole,
Ha biscoas nemet glac'har nem eus bet em bue ;
Glac'har a guir garantez, setu va flaneden
Planeden rust a kalet da heuilla pen-da-ben

Pa oan em bugaleac'h va vam baour, aliez
A lavare din : « Va mab, var ar bed, ar Werc'hez
« Péd anezhi, va mabic, ped Gwerc'hez Remengol,
« Mar e fedez a galon, biken ne ni da goll »

Patrones ma mam dener, Gwerc'hez vad Remengol,
Ped gweach oc'h euz hu miret da doun me eat da goll
He peded am eus bepred, breman, araog mervel,
E kanin he melodi d'am breudeur Breiz-Izel

Pa guimiadiz dioc'h va zud da ziz pell euz ar guer,
Evit mont var ar studi en kollach Landregner,
M'em boa nemet penzek vloa, me a wele dourek,
Rac evidon ne oa ken, allas !... a eureusted !...

O tostaat oc'h Landreguer e kavis eur plac'hik ;
Koant vel eun ælik Doue, he hanno oa Metik
D'ar gouent a ze ive, doun d'ar studi,
He c'halonic-*oa* mantret kement a va hini.

« Salud deoc'h plac'h iouang a lavariz dezhi,
« Evel d'oun oc'h ankenied ho kuitad tud ho ti,
« Ho tournik flour em dornik laquet gant karantez,
« Hac sesimp eurussoc'h o wela assembles »

Ar plac'hik a laaras : O cloarec Gwenole,
« Pedomp Doue alies an eil evit eguile
« Er joa kouls hag en anken d'alc'hit sonj a Vetik
« Euz a vreman da viken e o mestrezik

« — O Metik, va c'harantez, rozen ker Breiz Izel !
« War ho mignon Gwenole tolet breman eur zell,
« Eur zell digant ho lagad a raï eurusted
« Keit a ma lezo Doue ac'hanon war ar bed »

Eru en kaër Landreguer, erru e penn hon hent,
Me oe kasset d'ar golach, ha Metik d'ar gouent ;
An disparti oa kalet c'huelo hag ankeniuz,
An eurusted er bed-man n'eo ket paduz !...

Dre ma chomiz er golach, skeuden dous Metik kez,
Enn deiz, enn noz, diaison he deus aliez
Neuze peden Doue ha zen koz Breiz-Izel
Vit ma vije en e bue, laouen euvreuz santel.

II

Pa eo achu va studi en hiz d'a Remengoll,
Da bedi c'hoas evit hi Gwerc'hez vad *Remed oll*
Seiz tro a riz d'an noter, devez a pardoun bras,
Ha seiz tro d'an iliz sakr war ben ma zaoulin noaz.

Goude an offeren bred, o pebeuz levenez ! ..
Er verred, gant e man ger, e velis Metik kez
Laouen eo evel an deiz, ha coant evel al loar
Biscoaz pen-heres ken koant n'euz bet war an douar.

Lugerni a re he sall, he diou chod gwen a ru,
He gueno vel eur rosen, he bleo, he lagad du,

Eur groaz aour en he c'herc'hen, e c'hoef dantelezet
Lavaret vije eun æl euz an év diskennet

« O pebeus joa evidomp, va c'hloarec Gwenole,
« En em gaout en Remengol deis pardon mam Doue
« Mam an oll dud ankeniet, Gwenole, ma mignon,
« Evidomp, e pep amzer, he fediz a galon.

« — Metik koant, setu aman eur voalen aour,
« A roas d'in araog mervel Annaik, va mam baour,
« Doug anezi var da viz, kemer hi digant en,
« Me dou war goalen ma mam d'ez karet da viken

« — Ar groas aour zo em c'herc'hen a vo did Gwenole
« Eur guchen euz va bleo a roan did ive ;
« War ar groas e touan a dirag ar Werc'hes,
« E vi kared gant Metik, tre ma vo en bue. »

Ha daoulinet en illis, hon deuz groet eur beden,
A roet evit offrans, eur c'houris koar melen,
Beniguet ho medalen, poket da relegou,
Da relegou Sant Breiz, karet gant hon tadou.

Goude hon euz baleet hon daou da Breiz Izel,
Ha gwelet kals ilizou, kals a dourio huel,
Abatti Landevennec, ha môr Douarnenez,
Lec'h ma oa Ker-Is hag ar brinces Athez.

Gwelet hou euz Mene-Hom, hag illiz veur Quemper,
Mene-Bre, illiz Bulat, hag hini Landreguer,
Kastel Brest, Sant-Ian-ar-Bis, illiz Salaün-ar-Foll,
A kaera tour zo er bed, tour huel Kastel-Poll.

Gwelet hon euz Ker-Ahès, Kemperle, Pont-n'Abat,
Fouenan, bro ar merc'het koant, Guengamp hag Huel-
Montroulez a Lan-Huon, Kroson a Les n'Even [goad,
Kallac, bro ar gourino, Kastel-Lin, Rosporden.

Klevet hon euz e krozal a môr beg a Raz,
Biscoaz den naentremenaz eb zantout aou pe c'hlas,
Bet omp en ene Sinun, en Roueseaz, Molenez,
En enez Vaz, er leodet, ive er Seiz-Enez.

Eur blavez omp bet euruz evel eal Doue,
A setu lec'h pa ho gwelet an oll a lavaret :
« Setu kloarec ar Rannou, soul even eur serven,
« Setu Metik, e vestrez, fresq evel eur rosen. »

III

Devez pardon Sant-Herbot, e klevis eur c'helou,
En euz beuzet ma c'halon en eur môr a zaélou,
Gant e zad ha gant e mam d'am mestrezik Metik,
E oa choaset da bried eur Pagan pinvidik.

Ar Pagant-ze oa diot, hep furnez, hep skiant,
Ne gare war an douar nemet ar gwin ardant ;
Metik paour, pa e gwele, a grene gant ankrez,
Hoguen, he zud oa dallet, allas ! gant an danvez !

Mont a riz prim da gwelet, neuze da Gerzanton,
Dre ma tostaen, em c'hreiz a grene ma c'halon ;
War dachen ar bourg, e son, e oa ar biniou,
Tud an eured ha Metik, beuzet en e daelou.

Metik, a dreuz e daelou, a reaz ouzin eur zel,
En eur lavaret ; *Kouraj, mignon fidel !*
Monet a ra en illiz, lavaret ra d'ar belek :
Guenole eo a garan hag hen vo va fried !

Koueza raze d'an douar, ractal, ar ben-heréz,
Ha douguet eo dioc'h-tu euz an illiz er mez :
Dispak e c'hoef, e dillat, a dispak e bleo :
Seplantout a ra beza eun elik paour maro.

Mantret oll gant a glac'har e kouezis d'an daoulin,
En eur grial : O Metik, zell a drue ouzin ?
Pokat a riz d'he dornik, d'he diou chod, d'he c'her,
O ! Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garan ! [c'hen !

An dizesper en dro d'in, evel eur vantel blom,
A chassas pell ac'hanon, pell war zu Mene Hom,
Va skiant a zo kollet, va c'halon a zo ien,
O ! Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garien !

Eiz de goude aseet e kreiz koat a Rannou,
War va diou chod a red diou feunteun a zaélou.

— 5 —

Pa glevis e Remengol o zon anter-noz.
E lavariz esklamet : « Va Doue deoc'h bennoz.

« O Gwerc'hes vad Remengol, sellit ouz va glac'har,
« Aman oun deud da vervel, breman, war ho touar ;
« Varc'hoaz, pa zavo an eol, arc'hantet en envou,
« Dindan an derven goz, me a vo kavet maro !..

« O Metik, va douzik koant, pehini a garien,
« Kenavo laran did, er bed-man. da viken,
« Gant ar maro unanet, ni c'hoas, en em garo,
« Kenavo er barados, kenavo, kenavo ! ! !..

— IV —

An de varlec'h da sav eol, eun durzunel hep par,
A hirvoude en derven he c'hlemou a glac'har :
Ar c'hloarek a oa maro gant an anken,
En eur lavaret : *Metik ! te pehini a garien !*

Ar c'hloarek paour a starde, c'hoas var he vuzellou,
Kroas aour a bleo du Metik glebiet gant e zaëlou,
War an derven doa skrivet hano e garante,
Ho diou galon unanet, treuzet gant eur c'hleve.

Kasset oa bet ar c'hloarek da veret Remengol,
Pa sebliet en dishoel illiz zakr *Remed-Oll*.
Illiz patronez he vam, e deuz bet ken karet,
Tud iaouank a Vreiz-Izel, pedit vithan bepret.

Setu eta Gwenole en e wele douar ! ! !
Eur miz goude eo klevet hanadou glac'har...
Eur plac hik gwisket en du en bered Remengol,
Dont di da bedi Doue ha Guerc'hes Remed oll.

O tremen dre ar vered, velas var eur men be,
Skrivet, neve flam, hano e mignon Gwenole,
Epad an nos daoulinet, Metik wele dourek,
Ha da men be e poke, e poke kalonec.

« O Gwenole, emezi, setu te en repos,
« En douar zakr Remengol ez out deut d'am gortoz,
« Mes ken ma stardo an de, o ma muia karet,
« Er be-man, dre c'hras Doue, ni vezo unanet ! ! !

Da sav eol, eur beleg kos vont da bedi Doue,
He c'havas anter varo, gourveet var ar men-be :
Rei a reas d'ar plac'hik paour absolver a pardon,
Metik ar varvas laouen, ractal gant ran kèlon !

En eur vogeden ezans ene gwen Metik kez,
Vel eur goulmik a nijaz d'an ev gant an ælez :
Euz a Varados Doue eur goabren arc'hantet,
War tour illiz Remengol, neuze zo diskennet.

War ar goabren ar Werc'hes ha Sent kos Breiz-Izel,
Deus kurunen Gwenole, hac e vestrez zantel ;
Barzet an amzer guechal, dran var e solennou,
Da Zoue, en brezonnek, e gane he gwerziou.

Sebeliet he kort Metik, kichen koat Gwenole,
Ar maro deus unanet an eil gant eguile.
Eur c'hloarek karantezus deus var o be skrivet
Ar c'homzo truezus man, gant he zaelou mesket :

« Aman repos en pecc'h kloarec Koat ar Rannou,
« Den a fetz hag a galon, den a garie e vro ;
« En e guichen eo kousket penn-herex Kerzanton,
« Metik, an elik Doue, maro gant rann galon ! ! ! »

O Gwerc'hes vad Remengol, setu o taou buguel
Kousket en tall oc'h illiz ha dindan ho askel ;
Vel eur vam karantezus war gavel e mabik,
C'hui dolo evez war be Gwenole ha Metik ! ! !

Kleier, ogrou Remengol, truezus c'hui sono ;
Barzet ha pelerinet, daelou c'hui a skuillo,
War be Metik-Gwenole, pa refet ho peden,
Eur beden a garante a karguet a anken.

Bevit en doujanç Doue, tud iaouank Breiz-Izel,
Pedit Gwerc'hes Remengol, evit ma viot zantel ;
Sonjit ive e Metik, sonjit e Gwenole,
Bezit evel-the fidel an eil d'eguile.

Koat ar Rannou (Rann, Rannou, chants, série),
bois des chants et des séries. Koat-Bras e dero, e zó
e kichen, ha d'ar sav-heol da illiz Remengol. An

Bois des couples réglés

drouizet, beleien, ar Vretonnet guechal c'hoas difeiza drec'he, bep bloas, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eur louzouen hanvet *huel var*, pehini a sav var an deyo *Dera*

Barz, barze (Barde, poète) Bep bloaz ive en em gave e koat ar Rannou hag e Remengoulou, herie hanvet Rumengol, barzet an Arvor. A re-man oa tud a skient, pere a gane gwerziou gret ganthe war an traou kær erruet er vro, kana rent ive meulodi Teutats, doue faoz, pehini voa enoret elec'h man breman illiz Remengol. D'an hini vije hanvet Bars e roer eur gurunen dero hag eun delen aour, war pehini a barz a gane e zoniou.

Gwenclan, Marzin, Talliezin, a oa barzet en Breiz-Izel, kent ma teuz hini ar feiz kristen. — Breman zo c'hoas en Breiz kals a barzet, pere a laka o studi hag o foan evit kenderc'hel en hon touez a feiz ha iez ho bro. Er pen kentan euz ar barzet e man an aoutronez Kermarker, bars Breiz ; an abad Herri, bars an Aviel ; Troudec, bars ar Vugaligou ; Kemar, person Vikel-Vras a escopti Gwenet, bars Sant-Gwen-Eal ; an abad Klec'h, bars Rugolven ; Kaourantin Thomas, bars an Tourtan ; Prosper Proux, bars Kerne ; An Hegarad, bars Plouëc ; I.-P.-M. Ar Scour, bars an Itron-Varia-Remengol ; F.-N. An Huel, bars Ker-ar-Born ; Ollivier Souvestre, bars Plouian ; an abad Poulaoek, kure Landevenek, bars Sant-Gwenole ; Karis, person Plougras, bars Menebre ; Guernisson, bars Peravela ; Kals a re all, pere o deus gred eun niver bras a yerziou ha zoniou kær.

- « Kanit a nezho, Breiziz, rag bea int gwerziou
- « Gret gant skien a kalon, ha gant gwel vad komzou,
- « Gret in e brezonnek mad, nan e koz vrezonnek,
- « Evel a re zo kals ne brezonnek gallek,

Barzet a pelerinet, kanit gwerziou zantel.

Kanit gloar ha meulodi da Vam tud Breiz-Izel ;

Ho mam hag o Patronez Rouanez ar bed oll

Mam an dud paour ankeniet *Guerc'hez vad Remengol*.

I.-P.-M. AR SCOUR.

Barz Itron-Varia-Remengol.

(Propriété de l'auteur.)

ANN HINI A GARAN

Var eun ton nevez

An hini a garan, zo coant evel an eol,
 Karantezus evel Gwerc'hes vad Remengol,
 Doue Sen-Breiz-Izel, Doue va zadou koz,
 D'an hini a garan, roit bepred ho penoz.

An hini a garan, zo douç evel al loar,
 En noz pa sclerigen bugale an douar,
 Doue Sent-Breiz Izel, etc.

An hini a garan zo vel eun alc'hoeder,
 D'am c'halon paour e kant zonion, gwerziou tener.
 Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan zo vel eun durzunel,
 Pa ve maro e far en em dol da vervel,
 Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan zo vel eun elik Doue,
 Eun elik douç a ra joasted va bue.
 Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, zo douç e hano,
 Evel ar mel eo mad, koant evel ar bleunio.
 Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, em c'halon a chomo,
 Tre ma vin en bue a goude va maro,
 Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan, gane me en disheol,
 A reposo eun deiz en bered Remengol,
 Doue Sent-Breiz-Izel, etc.

An hini a garan en palez an Drindet,
 Gane-me da viken a vo karet, karet.
 Doue Sent-Breiz Isel, Doue, va zadou koz,
 D'an hini a garan roit bepred ho penoz,

I -P.-M ARSCOUR.

Barz Itron-Varia Remengol.